

Galoun-Zakr evit an dud. Ma ne c'hellomp mont betek heno,  
ni a vo a galoun gant ar re a ielo, hag a bedo assamblez gant'ho.  
Hag er miz a zeu ar *C'hannad* a roio eur c'helou benag euz ar  
goueliou kaer-ze.

---

## DOUE HO PAEO !

1.

E bro ar Silezi, en eur vourc'hadennik,  
Ioa o choum, breman zo pellik,  
Eur vaouez oajet braz, toc'hor ha dibourve,  
Mes guir vignounez da Zoue.

2.

An hini goz 'veve divar an aluzen ;  
Gwall galed ioa he flaneden ;  
Memez tra e veze dous ha laouen bepred ;  
Enep Doue ne glemme ket.

3.

Eun deiz, dinerzet holl, poan ganthi o kerzet,  
Ar baourez 'lakas 'n'he spered  
Ma c'halje da zibri kaout eun tammik kig mad,  
He nerz en dro 'zeuje timad.

4.

Ar baourez a zounje : Gwella tra 'meuz d'ober  
Eo mont bete ti ar c'higer ;  
An den-ze, daoust ne zeuz liard ebet ganin,  
A gemero truez ouzin.

5.

Mont a ra kamm-digamm, pounner he c'hammejou...  
Ar c'higer zo var he dreujou.  
« Va den mad, emezhi, ho pet ar vadelez  
Da rei eun tamm kig d'ar baourez. »

6.

Ar c'higer, gant eur vouez dichek ha divergont,  
D'ar baourez koz a gred respont :  
« N'e ket oc'h paterou eur goz radoterez  
E trokan va marc'hadourez !... »

7.

« Evit hoc'h aluzen, emezhi, me laro  
Ar beden : « *Doue ho paeo !* »  
Talvout a ra hirroc'h eget arc'hant hag aour,  
Pa vez lavaret gant ar paour. »

8.

Da c'hoarzin goap dezhi 'n'em lakas an den fall,  
Pa glevas ganthi kement all.  
« Guelomp 'ta, emezhan, pe bouez zo 'n'ho ker...  
Lakit-hen var eun tamm paper !... »

9.

Setu an hini goz ha kemer eur bluen,  
Da skriva he zammik peden ;  
Hag ar paper varnhan merket ar c'homzou-ze  
Er valans oe taolet goude.

10.

Kaout a ra d'ar c'higer an distera tamm kig  
'Zavo en ær ar paperik ;  
Mes dizale 'velas ez oa bet faziet :  
Tu ar paper ne finve ket.

11.

Lakât a ra neuze eun tamm pounner-pounner ;  
Pounneroc'h c'hoaz eo ar paper...  
Bernia 'ra tammou all, betek an diveza :  
Ne c'hellas ket hen dibrada !

12.

Dre eur burzud dispar ioa plijet gant Doue  
Rei eur gentel gaer d'an ðen-ze ;  
Desket hen doa dezhan pebeuz talvoudegez  
Ho deuz pedennou ar paour-kez.

13.

Ar gentel vurzuduz ne iez ket da goll ;  
Raktal ar c'higer mantret holl  
A c'houlennas pardoun digant ar baourez kez  
Da veza bet ken didruez.

14.

Oc'hpenn, da rapari, e lavaras dezhi :  
« Deuit bemdez bete va zi ;  
An aluzen bemdez diganen ho pezo ;  
C'houi laro : « *Doue ho paco !* »

15.

An hini ioa kentoc'h ken rust ouz an dud kez  
Oe mad outho ac'houdevez ;  
He galoun a dride, pa roë aluzen,  
O klevet peden ar beorien.

16.

El leac'h ma ioa neuze savet ti ar c'higer  
Zo breman eur chapel dister.  
Dalc'hamad e tigas sonj da gristenien ar vro  
Petra dalv « *Doue ho paco !* »

A. M. D. G.

---

Le Gérant : BOZEC.